


26th Nevez-amzer ar varzhed



LA GRÂCE

Printemps des Poètes – 25 ans
Du 9 au 25 mars 2024

Soutenu par




Concours de poésie jusqu'au 24 février
Spectacle ~ remise des prix du concours
vendredi 22 mars 18h30 - An Dour Meur

© ANAP 2024



Printemps
des Poètes



Renseignements

Médiathèque

Place d'Auvelais

22310 Plestin les Grèves

02 96 35 60 42

mediatheque@plestinlesgreves.bzh

www.mediatheque-plestinlesgreves.fr

« Nevez-amzer ar varzhed » - NEVEZ-AMZER AR VARZHED - digor betek ar 24 a viz C'Hwevrer 2024

Digor eo ar c'honkour barzhoniezh aozet gant Mediaoueg Plistin d'an holl. Tri rummad a zo : **yaouank, tud deuet ha tud a vicher**, e meur a yezh : **galleg, brezhoneg ha yezhoù all a Frañs**.

Goulenn a raer reiñ un droidigezh e galleg evit ma c'hallo an holl profitañ eus ar varzhoneg hag evit ma vo intentet ervat gant an holl varnerien.

Kasit ho parzhonegoù, bizskrivet (pe dornskrivet), ur bajennad A4 a hirder dezhe d'ar muiañ, o plediñ dre ret gant an tem la-kaet evit 2024 gant « Nevez-amzer ar varzhed » : **Ar C'hras**

Gant ar barzhonegoù dizanv e vo lakaet daveoù ha oad ar gonkourerien, ha kaset e vefont dre bostel da **mediatheque@plestinlesgreves.bzh** pe, a-hend-all, dre lizher post da « **Nevez-amzer ar varzhed** » - **Mediaoueg, plasenn Auvelais - 22310 PLISTIN** peotramant c'hoazh laosket war-blas.

Pellgomz : **02 96 35 60 42**

Kemer perzh er c'honkour a zo evit mann hag a dalvez bezañ a-du gant embannadur nanngopret an oberennoù gant **ar Vediaoueg**, ispisial en dastumad barzhonegoù a vo embannet goude ar c'honkour hag a vo moaien da amprestiñ.

Reiñ ar prizioù a vo graet d'ar **gwener 22 a viz Meurzh da 6e30 d'abardaez** e Sal An Dour Meur e Plistin. Ar re ac'h ay ar prizioù 1^{añ} gante a vo profet dezhe ur goumanant ur bloaz da vediaoueg Plistin, pe plasoù evit arvestoù en Dour Meur, pe plasoù e sinema An Douron. An holl genstriverien a vo aze en deiz-se e vo roet levrioù dezhe.

« Ar c'hras e kement stad zo anezhi, eus an hini hollgaerañ d'an hini garv ha krenn a danfoeltr war an taol. (...) An doare « n'ouzon peseurt »-se ha n'en deus graet, a-hed ar c'hantvedoù, nemet cheñch doare, o c'helver gwech d'an drehontegezh, gwech d'an disonegezh.

Rak estreget doueel pe benniget eo ar C'hras, estreget koantiz eo, estreget steuzius ha millis, estreget neñvel hag en tu-hont d'ar gerioù.

Evel-just ez eus eus gras vat pe gras fall Rimbaud, eus gras frealzus Verlaine, eus gras Eros, hini ar c'hig, eus gras an unaniezh kevrinek, gras ar galon hag ar spered Max Jacob. Met bez ez eus dreist-holl eus ur stad a c'hras ar gomz, ha stad gras ar c'horf a-bezh, an hini a zo anavezet gant ar varzhed koulz ha gant ar sportourien pe an avanturerien.

Poent eo deomp lemman hon eneoù evit ma vo trehontet hor faltazioù hag hor buhezioù gant ar grousted, al laouenidigezh hag ar splannder, evel ma veze graet eus Teir Gras ar vitologiezh, pe teñval pe heoliek e vefe ar c'houlz. »

Sophie Nauleau, Renerez arzel « Nevez-amzer ar Varzhed »